

Er Mor Bras

Er mor bras 'mañ Tahiti, ma enezenn gaer.
An avel flour, an heol splann, an traezhenoù hir.
C'hwezh vat ar bleunioù gweet er blev,
Ur yezh vrav a gomz an holl,
Da lal' blaz war o bro, a rumm da rumm, a-vishoazh.
Ar sonerien, an dañserezed,
Livioù tomm danvez o dilhad
Splann ha glas 'vel ar mor
Er mor bras.

Pa vez tomm, brañsigellat en ur gwele-skourr.
Ur glazard glas a gousk war e garreg vras.
'Duto biken ar menez-tan,
Palmez hir a gresk atav,
Ar boued mat, ar frouezh dous-mel, 'hed ar bloaz, Tahiti.
Redadegoù gant pirogennoù,
Kistin-mor, melloù kregin,
Splann ha glas 'vel ar mor
Er mor bras

Tiez war peulioù, a-us d'an aod, toennoù plouz,
Deus 'ta da splujañ !
Splann ha glas 'vel ar mor
Er mor bras

Deomp da seurtiñ gwagennoù, 'mesk ar c'houral
Gant an delfined
Splann ha glas 'vel ar mor
Er mor bras

Splann ha glas 'vel ar mor
Er mor bras